

*YF\_0063\_Ar gorventenn*

Ar son-man zo kompozet war ar c'hopi galleg  
Mar gallfen goud ar feson d'he zrein e brezhoneg.

Me ho ped 'ta Btetoned da zond d'am selaou  
Me gomz deus ar gorventenn zo paseet barzh ar vro.

Barzh ar bloavezh mil nao c'hant seizh ha pevar ugent  
D'ar c'hwezek a viz here pa oa hanter noz sonet.

Na me zo bet dihunet ya sur dre un taol spont  
Gant an avel dirollet e koler ha yudel.

Na greden ket kaozeal na keneubeut boujeal  
Ne oa ket goulou en ti evid en em skerijenan.

Na pad teir eur horolaj ya sur e oa padet  
Ar gorventenn maleurus prenestou a grene.

Na pa oa deuet ar mintin neuze oamp sortiet  
Na pa sellomp en dro deomp hor c'halon zo mantret.

Pa oan antreet er c'hoad eur pennad avanset  
Me 'm eus kavet eun heizez dindan ar wenn lazhet.

Nag en-dro dezhi a oa pemp a heizez vihan  
Evel d'eur vandenn vugale en dro d'o mamm marvet.

Nag al lapined bihan a oa tout sporonet  
Na kollet ganto o zud n'ouzent pelec'h moned.

Na gand ar postou bihan a teuas ar c'helouiou  
Partout em bro Breizh-Izel a zo traou distrujet

Batimantou perzhier mor, kalz a zo bet torret  
Na taolet ha distaolet an eil deus egile.

Na kalz deus an toennou savet gant an avel  
Na touriou an ilizou kalz a zo diskaret.

Ar c'heger diwar ar beg a zo kaset da nijal  
Ar c'hleier na vrallont ket d'ar sul d'an ofern-abred

Partout diwar an henchou a zo gwez diskaret  
A-benn sirkulin a vo ret dond d'o dibarasat.

Me o vont beteg ar c'hoad war zigarez pourmen  
Trist a oa gwel an tachenn gand ar gwez displantet

Betek aman me c'halle lared a vouezh uhel  
Nag e oa Koad Uhelgoad ar c'haerran e Breizh-Izel.

Na pa teufec'h da bourmen breman e Breizh-Izel  
Pa sellfec'h deus ar c'hoajou c'hwi chomo souezhet.

Na kalz deuz ar gwez bleaset zo o membrou troc'het  
Evel d'eur vandenn soudarded o tond deus ar brezel.

Me n'on ket evid kanan na gouelan war un dro  
A-benn vo ken kaer Breizh-Izel e vim maro pell 'zo.